

SONIG AR IAR.

War eun ton anaveet.

Me gano d'ac'h mar chelaouet
Eur zonig a zo bet savet
Diwar-benn meuntrerez ar ier ;
Tolet ple na pe zort micher !
Dismegansusan hini vad !
Ha lousan vid eur plac'h a stad.

Eur iarik neve deut er bed
A gare stard hep mar-ebed
Klevet ar c'higi hag ar ier
O kanan tro-war-dro d'he c'her ,
Ken a c'hoantaaz eur beure
Monet da welet aneze.

Ann daouzeged a viz genver
E iez hon iarig euz ar ger,
Mont a rez kuit diwar ar c'hlud
Hep ma reaz nimeur a vrud ,
Ti eunn amezek da vale ,
Ann tol kentan euz he bue.

Dal ma lekaz he fenn enn ti
Laraz Fransezan da Vari
C'han-ta Mari , me Fransezan ,
Mar g-hellomp krigi er iar-man
Pa dei tudigo da vale
A vo mad d'ober souben d'he.

Ar iarik baour , dal ma glevaz,
Monet prim er mez a glaskaz ;
Klask tec'hel kuit war vek botez ;
Mez siouaz paket ar iar gez :
E kraou ar zaout e oe taget ;
Ha raktal enon dibluet.

Ann amezeien gant glac'har
Gleve kriadenco ar iar :
Krial a re a-boez he fenn
He bue war ziou gailloustren :
Rait d'in eur pennadig amzer
Da ober kimiad d'an zud ker.

Kimiad a rann a galon vad
D'am diou vestrez ha d'am mestr mad ,
Koulz d'ar c'higi all euz ar vro
Ha d'ar polezi tro-a-dro :
Me a het d'ann oll blavez mad
Med d'ann hini a skuill ma goad.

Potren iaouank , o pidi rann ,
Pa vo deut ar pardonio han
Mar gwelet meuntrerez ar ier
Diwalllet mont d'he c'has d'ar ger ;
Tolet evez ann neb he c'har ,
Pe en defo soubenig iar.

Ha c'houi , klevet , amezeien :
Mar g-a ho ier d'ober souben
E teuio kernez war ar ier
Hag ann uo da vean ker ,
C'hoaz e vo groet malarje fall
Ma ne ve kat eunn tamm kik salt .